


SANTEZ ANNA

Komzou : Saïk Falhun

Kristenien da viken (Nn 18)



Diskan :

**Meuleudi deoc'h, o Tad, evid santez Anna,
Mamm zantel da Vari, or patronez deom-ni.**

1. Goude pehed Adam An dén oa diskaret ;
Doue da Abraham 'lavar 'vo adsavet.
2. Yoakim hag Anna, Gand feiz ar Yuzevien
A c'héd on dasprena 'Vo ganet euz o ouenn.
3. Ar verc'h krouet dinamm, Ganet en o c'hozni,
A vo enor he mamm : Anvet ez eo Mari.
4. Leun-barr al levenez E kalon ar vamm-goz :
En he merc'h, ar Werhez, E kan ar baradoz.
5. Kristenien Breiz-Izel, Ni 'zo bodet hirio,
Or c'halon d'an uhel, E soñj ar Bosenno.
6. E park ar Bosennou Santez Anna Wened
A garg a vennoziou He Bretoned karet.
7. O Mamm Santez Anna Dindan ho tiouaskell
Pegen kaer eo beva, Pegen dous eo mervel.
8. Gloar d'an Tad peurbadel, Da Jezuz, or Zalver;
Gloar d'ar Spered Santel, Treinded en unander.

SAINTE ANNE

R: Louange à vous, O Père, pour Sainte Anne,
Sainte Mère de Marie, notre patronne.

1. Après le péché d'Adam L'homme était abattu ;
Dieu à Abraham Dit qu'il sera relevé.

2. Joachim et Anne, Avec la foi des juifs
Attendent notre Rédemption Qui naîtra de leur race.

3. La fille créée immaculée, Née dans leur vieillesse,
Sera l'honneur de sa mère : Elle est appelée Marie.

4. Comble de Joie Au cœur de la grand-mère :
En sa fille, la Vierge, Chante le paradis.

5. Chrétiens de Bretagne, Nous sommes rassemblés aujourd'hui,
Notre cœur se réjouit, En pensant aux Bossenno.

6. Au champ des Bossennou Sainte Anne d'Auray
Comble de bénédictions Ses Bretons bien-aimés.

7. O Mère Sainte Anne Sous vos ailes
Qu'il fait bon vivre, Qu'il est doux de mourir.

8. Gloire au Père éternel, A Jésus, notre Sauveur ;
Gloire à l'Esprit Saint, Trinité dans l'Unité.